

Ollivier 471 d

CHANSON NEVEZ

Var Sujet Daou zen Yaouanc pere en em Garie gant Fidelite.

Voar eun ton nevez.

A Beilard, Horac, Tibul, Catul, Ovid, Orphe,
Choui, modelou sincer deus ar guir amitie,
Laqit oll em guenou ho proposiou charmant,
Inspiré an speret va c'halon languissant.

Me ya da zisclerya va buez maleurus :
Tostait d'e c'blévet, tud yaouanc curius ;
Deut oll da bartaji va glac'har, va c'hlemou,
Ha formit ganin-me ur feantun a zaélou.

En escopti Treguer e voa ur plac'h charmant,
Hac e doa ravisset calon meur a zen yaouanc :
Demeus an oll merc'het a meus darempredet,
Hy eo dre breferanç dreist oll a meus caret.

Mes he sellou qén douç, hac he c'homzou deread,
He furnes, he douçder, hac e bolontez vad
Alumas em c'halon flammou an amourouset ;
Bep instant va speret voa ganti occupet.

Var fovennou yaouanc, gant beg eur ganivet,
Tro-var-dro hon hanô lies am eus scrifet,
C'houi, plantennou eurus, a gresco nos ha de ;
Ni garfe evelloc'h e cresqfe hon amitie.

Ne meus mui a blijadur : nemet arru e vez
En deiz d'allout guélet objet va c'harantez :
Ennan ma residanç dezir va fantazi,
A guement zo'r bed-man ne garan nemet-hi.

Mes, allas ! forcet eo chaden ar blijadur ;
Troet va flaneden en flammou dinatur :
Bréman a dra certen vezo rét e c'huitat !
Maucout ra va c'halon, sclerder d'am daoulagad.

Doüe oll-buisant ! roit din asistanç,
Vit m'allin d'am mestres mont d'annonç ar setanç :
Me a ya c'hoas eur vec'h bete ty va mestres,
Gant eur galon carguet ; leun a dristidiguez.

Cetu me vis-a-vis d'am guir muya-caret,
Princes an amitie, model an oll merc'het,
Va oll gontantamant, oll joa deus va speret,
Hi a garg va c'hanlon bep heur ha bep momet.

Neus netra endro din na repet d'am memor :
An amitie fidel a zo dreist pep sort tenzor,
Mes bréma e redoubl oll glac'har va speret,
N'allan qet comz outi, qement e zon mantret.

Abondanç va daélou a deu d'am daoulagat ;
Carguet eo va c'halon demeus a huadad.
Petra zo, va mignon, ma zo c'h qen desolet ?
Deus hoc'h affliction contit din ar sujet.

Queun meus a greiz calon o velet ho tourmant,
Me garfe ve'm pouvoar réi dec'h soulajamant.
D'am anui, d'am glac'har, c'houi a zo calz qiriec ;
Abars varc'hoas vintin me a vo partiet.

Possubl ve, va Doüe, e ve guir qement-se,
E vec'h-u deut aman vit qemer hon conge !
N'en deo nemet re vouir ; partia a vo ret :
Arru eo va c'herent da bronouç va arret.

Arça, va servicher, e zit-ta d'am c'huitat !
Penaus a rin breman ? Houman zo calonad !
Va oll santimançhou zo ganéc'h gonezet ;
Me a vo maleurus, ma vemp dispartiet.

Arréit ho taélou, n'en em desolit qet ;
Bars eur mis d'ar pella, me zeui c'hoas d'ho quelet,
Qemerit confianç ha chomit en ho peoc'h ;
C'houi eo va oll esperanç : ne garan nemedoc'h.

Allas ! va zervicher, n'en deo qet hep réson
E velit ho mestres e qer bras affliction :
P'o po chenchet a vro, c'houi chéncho a lezen ;
Eur vestres all o po, c'houi'm dilezo a grenn.

Ha pa ve laqaet entrezomp-ni hon daou
Qement demeus a hent vel zo ac'hau d'an evou,
Credit en assuranc biqen n'ho tilezan :
Biqen mestres n'am bo met an hini breman.

Birviquen n'ancouezan ar pez a zo touet,
C'houi c'heus sonch va mestres, a voueliou Nedelec ?
Em boa aon em tilesjac'h en deiz voa o tonet
An hini no zezire nemet beza ho pried.

Ha neuze, va mestres, evit va c'honsoli,
Gant eun ær qen constant teujoc'h da bropos din
Monet d'an ilis vras, eno dirac Doue,
Da bronouç ar sermant deus ar fidelite.

Etre peder ha pemp heur, ar meus dabardae ;
En em rentjomp en ilis an eil gant eguile,
Ha pa voamp daoulinet vis-a-vis d'an auter,
E leqejoc'h ho torn en hini ho servicher.

Gant eur galon sincer, e faç ar Sacramant,
E teujomp-ni hon daou da bronouç ar sermant
D'en em garout fidel bete fin hor bue,
Biqen nemet ar maro sur n'hon dispartige.

Ha p'am be da veva qenlies a vlaves
Evel zo a zelién ebars en eur forest,
Birviquen n'ancouan va doussic Jan-Yvon,
Plijadur va speret, rouanes va c'halon.

Deus a greis va ene, me offr dec'h, va mestres,
Sacrific va speret ha va goad assambles :
Mar trahissan biqen va oll bromessaou,
Doüe d'am punisso a beb seurt maleuriou.

Qemerit, va mestres, vit merq a bromesse
Diou galon peur-dreujet gant ar memes cleve :
Var ar memes imach e cavot dessinet
Diou durzunel yaouanq en em garie parfet.

Ho comzou, va mignon, a zoulach va c'halon ;
Na ellan qet credi em lesfec'h en abandon ;
Assurit din c'hoas, var ho qir a henor,
Biquen na drahissot eur galon deoc'h digor.

Finissomp, va mignon, tost eo d'an anter-nôs,
Arru eo an amzer, poent é deomp repos.
Adieu, va mestres qer, qen a vo ar c'hentan ;
Ha dec'h, va servicher, mes retornit buan.

Aben pemzec de goude e retornis d'e guelet
Gant calz demeus a joa, na zanten qet qerzet
N'en den qet buan avoalc'h, m'am boa c'hoant,
Me zante e lampe va c'halon triomphant

Pa voan aru er plac en desir va bolonte,
E quichen va mestres evit clévet he doare,
P'e c'honsideris ervad e chommis estonet,
O tonet da gompren penaus e voa chanchet.

Evit parlant dezi, hi na responte qet ;
Eur flém sco em c'halon pe guelis qer mantret.
An douar arozet gant daélou he daoulagad
A voa eun test assuret demeus he c'halonad.

Ah ! m'am c'herit-u c'hoas gant guir fidelite
Disclevit e trezomp breman ar virione ;
Lerit din ar sujet deus ho melanconi ;
Well eo ganen mervel eguet réi dec'h anvi.

Allas ! va zervicher, ni a vo separet :
Da zemezi d'eun all me a zo contraignet ;
Henvoas zo lavaret e vigen goulennet :
Se a zo qiriec din ma zon qen glac'haret.

C'houi, Mari, va mestrez, am lez en abandon,
Goude ho peza laqet rouanez em c'halon !
Honnas eo ar recompanç e neus-me meritet
Goude beza ho caret re, dreist an oll merc'het.

Me ho ped, va mignon, na reprochit qet din
E ve va dessin breman dont doc'h abandoni.
Possubl ve'em accusfac'h a infidelite !
Ne meus discoelet dec'h nemet re garante.

Gout ouzoc'h coulz ha me pegueiment ho caran ;
C'houi zo cauz d'am zourmant pini a anduran :
Va oll garante voa gonezet oll ganec'h ;
Va brassa plijadur voa obeissa dec'h.

Bepret en n'em remet gant guir fidelite,
Bars an andret fixel herves ho polonte.
N'am mige eveld'oc'h nebutoc'h carante,
N'em bige ho quittet hep nep dificulte.

Me garje na vijem biqen eu em velet,
Pa zeo ret demp hon daou beza dispartiet :
Ma vije arru ar poent da veza demezet,
Credit penaus biqen d'am zad n'am bije pleguet.

Goude ar plijadur teu an desolation :
N'oufac'h mui evidon caout seurt affliction
Eguet d'am separi deus dezir va c'halon ;
C'houi voa va zervicher, va oll gonsolation.

Ebars em flaneden o pebes chenchamant !
Homan zo evidon eur voalen a dourmant !
Va amzer dremenet am chagrin, va mestrez,
Pa deu din da gompren bars em slijadures.

Sonch oc'h eus a vis ebrel, ar zul goude creiz-de
E rojoc'h din ar gach demeus hoc'h amitie :
Nan, biscoas va speret ne voa bet qen joaus ;
Hanval voa hon boneur d'ar sperejou eurus.

Mes breman e mantret gant an oll dourmanchou,
Me grede parfet mad e vijemp priejou :
Eun esperanç qen douç a rejouisse va c'halon ;
Me zonje na vije biqen separation.

Mes achu e va boneur hac achu evit biqen ;
N'en em zissipo qet evel ma ra'r glizen,
A zisparis en aer pa deu an eol da sevel,
Pe vel eun dornat pell guentet gant an avel.

Petra a zervich din beza laqet er bed-man ?
Bea da zouffr evidoc'h, o va mestres ! breman,
Qen hir ha va buez e pado va glac'har,
Me garre beza breman e calon an douar !

Adieu e laran dec'h qent eguet partia,
Me a barlant ouzoc'h vit ar vech diveza :
Biqen bars er vro-man n'ho quelan, va mestres :
Bet eürussoc'h evidon.... Adieu evit james.

M'ho ped, va zervicher, ouzin na fachit qet :
Pa golfen va buez, me n'oc'h ancouain qet.
Birviquen n'o quelin hep monet d'ho betec ;
Gant cals a gonfianç deut bepret d'am guelet.

Bet persuadet mad ho po consolation ;
C'houi e am eus choaset vit pried d'am c'halon.
Credit en assuranç biqen n'o tilezàn ;
James mestres m'am bo met an hini breman.

Ar silanç, ar glac'har ra fin d'hor preposiow,
Hor mouez a voa mouguet gant an huanadou ;
Demeus va daoulagad e rede an daëlou
Vel ar voasiou a tiruill demeus ar montagnou.

N'ouffac'h biqen sonjal qer bras desolation :
Me sonje voa plantet eur c'hleve em c'halon ;
Carguet a zizesper, na c'houlou nemet ar c'hraç
Ar maro ar prompta, an termen va disgraç.

Me voa bet pemzec dez, ia, ha pemzec nos
Hep me ellis biscoas qemer en tam repos :
Pa vijen em goele en dessin da gousquet,
Gant ar spont hac ar form e vijen difunet,

Bepret ar memes uvre a deue incontinent
Da respresanti din an objet eus va zourmant
En etat m'e guelis, pa bartijomp hon daou,
Ar flem, an disesper bars en hor c'halonou.

Lies e receive deus e c'hélou goude,
Dre voyen lizerou carguet a garante,
Pere am c'honsole epad va hir absanç,
O tont da jouissa deus joa an esperanç.

Cetu deja nao mis na meus goelet ma mestres ;
Arru eo ganin lizer digant he c'honsortes.
O pebeus qélou trist zo ebars anoncet !
A dall al lignen genta e meus-en remerqet.

O planeden barbar, leun a velanconi,
Ne scuisset-u qet c'hoas ous va fersecuti !
Pet quech e varvin-me qent mervel en effet ?
E prouvi ho coler, o petra meus-me groet !

Den ingrat ha perfid, caled ha dinatur,
Maro eo da vestres bars en displijadur !
N'ellis pelloc'h poursu ar c'helo desolant,
Coll a ris ar guelet, an nerz, ar santimant.

O roue an envou, mestr an Alez eürus,
Noc'h eus qet va c'hrouet evit beza maleurus.
Disqennit bete din sell lagad a druez,
Pe laqit prontamant eun terment d'am buez.

Ar spaç a drizec mis oun bet ous he c'henti,
Ne voan em plijadur nemet pa vijen ganti :
Hi a voa an objet eus va ambition ;
Qen ne allan cavet nemet affliction.

C'hoas e viran em pres he lizer deveza
A scrifas hi din-me qent quitat ar bed-mâ,
Ha pa ven va-unan lies en digeran :
Pa gommançan d'e leun, gant daëlou e glebian.

Gouëlomp oll, tud yaouanc, gouëlomp oll assemble !
Biscoas plac'h na zeus bet fideloc'h eguet honnas
Birviquen na zortio certen deus va speret ;
Bete fin va buez me e c'haro bepret.

Canit-u, rossignol, gant ho mouez triomphant,
Disquëzit d'ar c'hoajou hano ma mestres coant ;
D'ar mintin, pa bignit etrezec an ênvo,
Vigilant ha fidel, repetit he hano.

Trist e quichen he bez e lacan va c'harante ;
Ennan e repos breman objet va amitie.
Doue vit recompanç deus he c'harante fidel,
En deus accordet dei ar joayou eternal.

Ha pa deuyo an ancou gant e faç horrerus
Da lacat un termen d'am buez maleurus,
Deus ar memes momet ma vo va goad o repos
Me jouisso ganti eus joa ar barados.